

Skol ar Brezoneg

n° 9?

I. - Yann Pôtr - Ar - Gêr.

Pipi Gonto

gand Erwan Ar Moal (1874-1957).

II. - Kenstrivadeg Brezoneg "Ar Falz" :

- Tôliou spont
- Diwar-benn Meurlarjez

(Pennadou savet er skoliou)

O. L. S. B.

Oberenn al Leoriou-Skol Brezoneg

B. P. 19 - Brest

Erwan AR MOAL

(DIRNADOR)

Eun nebeud miziou a zo eo marvet, d'e 82 bloavez, en e di ginidig, e Koadou, tostig da Wengamp, ar mestr-skri-vagner Erwan AR MOAL, labourer douar diouz e vicher.

Ganet e 1874, Erwan ar Moal en em westlas abred d'ar stourm evid ar brezoneg. Dastum a reas war ar mêz, dre Vro-Dreger ha Bro-Gerne, eun toullad braz a gontadennoù hag a ganaouennoù.

E zastumadenn marvailhou, « PIPi GONTO », a voe embannet evid ar wech kenta e 1900.

Eul lodenn vad euz an toniou dastumet gantañ a voe studiet ha moulet e 1913 gand Maurice Duhamel en e leor « MUSIQUES BRETONNES ».

Eun 12 pe 13 pezh-c'hoari a zavas Ar Moal, en o zouez : « AR CHIMINAOU », « BILEZ HAG E VESTR », « POTR-E-VRAGOU-BERR », hag all...

Bez e voe e-pad eun daouzeg vloaz bennag e penn eur gazetenn zizunieg e brezoneg penn-da-benn : « BREIZ », — a baouezas da zond er-mêz pa darzas ar brezell diweza.

Dreist e oa Erwan ar Moal evid konta marvailhou en eun doare plijuz ha beo-tre. Implij a rê eur brezoneg êz ha pinvidig war eun dro, ennañ e-leiz a heriou hag a droiou-lavar c'hweg implijet e-touez ar bobl, en e gornbro Treger.

« YANN POTR-AR-GER » ar pennad anavezet kenan a room amañ da heul, a dalbezo kerkoulz evid beza c'hoariet gand or strolladoù ha kelhioù hag evid beza studiet en or skolioù.

Da vired saour brezoneg bro-Dreger Erwan ar Moal, ez om chomet ken tost ha ma hellem ouz yez ar skrid kenta embannet gwechall er gelaouenn « BREIZADIG ».

Yann Pôtr-ar-Gêr

Yann, e-unan en ti o ribotad. Rôg ma sav ar ridoch, e klever ar vaz-ribod o vond endro.

YANN, o komz, en eur baouez da ribotad

'Vid ar beure, en eur vond alese, he deus lakêt ar vaz-ribod din 'n em dorn: « Ma, emezi, pa n'oulez ket mond en kêr gand an amann, e chomi war ar menaj, entent a rez! » Fe d'am douah, hag abaoe on o skei 'barz ar banne lêz pistoutou-mañ, ken 'm eus grêt eur glogo-renn en gaol ma biz bihan... Madedoue, c'houezañ ran ive! Eun tamm diskuiz 'ray ket a zroug din, ha ne ray (azezañ a ra).

Ya, soñjal on chomet-me war ar menaj! Teuigno zur, an dud o devoa kustumet ober goap ahanon, 'balamour ma 'h ên da Wengamp, beb sadorn, gand an uou hag an amann: « Gogez ahann, Yann ar baner alese! » N'am-oa ken ma ano da brenañ etre du-mañ ha Gwengamp. — Fe d'am otrou person, 'mon-me, red eo din lôskad ar vicher-mañ! Janed, mar kar, a yaj da werzañ heh uou!

Setu ar beure-mañ, pa oam o kas o lein d'ar moh (respet deoh!) ha me o lared dezi: « Ma karez, 'h i en kêr hirie, pan eo brao an amzer! — Ya, emezi, ha piou a ray ma menaj? — Me!... » N'ouzon ket penôz e teuas ze ganin; mez pa oa deut, oa deut; ne oan ket 'vid dislared.

Mantret on, ma zud kêz, pa zoñjan pegen don 'm eus bountet eno ma biz 'n em lagad!... Ya, setu aze, mar vijen êt en kêr, vijen bet bremañ oh evañ eur chopinad, war ma fasanted, e ti ma homper Jobig ar Pinto, hag eh on o c'houezañ 'uz d'eur banne lêz ribod! C'hwi lar din: « E-skeud-se, da vihanañ, ne vo ket grêt goap ahanout! » Petra laret? Er hontrol eo! Me wel Janed o vond en kêr. Kentañ hini euz he homerezed en em gavo ganti — hag en em gavo ouspenn teir dousenn, etre Gwengamp hag amañ, — e savo kôz evel-henn: « Sell, Janed, te zo deut en kêr hirie? Neventi eo gweled ahanout, plah kêz. Petra 'ta zo arru gand Yann? » Ha Janed da respont, 'vel just: « Yann oa arru skuiz oh ober ar vicher gogez hag a zo chomet er gêr war ar menaj. » Hag he homer ker-kent: « War ar menaj? Feta, neuze n'eus ket cheñchet kalz a vicher! » Hag o diou, raktal, da sklokal war ma houst.

Souden, eh arruo eur gomer all hag e vo grêt ar me-
mez kôz; goude, eun deirved, eur bederved, eur bempved,
ha me oar... ba!... 'Benn 'n noz, vo êt ar vrud dre be-
var horn ar hanton ha beteg en Kerne hag en Treger,
penôz e oan hirie war ar menaj, o skotañ podou hag
o ribotad lêz. O! ar merhed! Ya! soñjet deoh! A-rôg e
veze grêt goap ahanon 'balamour ma 'h ên en kêr, ha
bremañ vo grêt gwasoh hoaz 'balamour ma on chomet
er gêr!...

Red e vije e oan kousket pe imobu, p'am eus lavared
e rajen-me ar menaj! Ar foeltr gand ar menaj-mañ!
Me garfe e kouezfe ar gurun warnañ, koulz ha war
gement teod komer zo etre Gwengamp hag amañ!...

Mez, ba! ne dalv ket din 'n em chakad! Red mad eo
reuzi: tremen heb takenn, kaoud dismegañs, ha labou-
rad gwasoh 'vid eur hi!

Pa zoñjan petra toud 'm eus d'ober, sed e teuan mezo
ha dall!...

(Eur bugel bihan, en e gavell, en em lak da
harmad.)

'Welet ket aze! Dihunet eo al lapous all ive!...

(O vond beteg ar havell, a-zlavêz, hag o lus-
kellad.)

*Do, do, Pouponig,
Do, do, Pouponig.*

Hag e oan o lared?... A, ya, petra toud 'm eus d'ober?...
Heum!...

... Tennañ plouz, lakaad al leue da zenañ, gouziliañ
ar vloh, kas anezi da vèz, peilhad pato, birvi dour, ribotad
lêz, lakaad lêz da zevel, skotañ podou, skubad an ti, sel-
led hag-heñ 'man an u gand ar yar velen, klask neiz
ar yar vriz, poahad mern, dibuni gloan, kerhad dour,
ober boued d'ar moh, frotañ ar presou!... Hag e soñj
deoh!... Ha trouz bremañ-souden, ma ne vez ket grêt an
traou-ze oll: « Diwall ervad ne ve ket dibunet ar gloan-
ze! Tôt pled ne ve ket skubet an ti-mañ! Diwall na lezfe
ar bugel-ze da ouelañ!... Pez soñj da gas ar vloh-se da
vèz!... N'ankouêz ket lakaad al lêz-se da zevel!... » Aiou
ma fenn!...

Hag e-keid-se, emañ Janed du-ze, gand he homerezed,
o lipad bannahou hag oh ober an tian ganin! « Ba! am-
zer gaer on-eus! Yann zo war ar menaj! » Ma! eur
banne am-o ive! Gonezet awalh am-eus anezañ!

(Digas ra eur werenn hag eur voutalh war
an dôl. Med ar bugel a harm.)

Diaoul biskoaz! Ne gousko ket hennez!

(Luskellad a ra.)

*Tavet, tavet, pouponig,
Ha me a gano deoh,
Pa vo arru ho mamm er gêr,
E roio bouik deoh!*

Me, avad, am-o eur banne a-rôg!...

(Mond a ra da ziskargañ en e werenn, pa
glever trouz ouz an nor. Lammad a ra da
guzañ boutailh, gwerenn ha ribod.)

Bet am-eus eur houad! Me grede din e oa arru tud!
Mar vijen bet tapet gand ma stal, soñjit deoh! Pesort
rieriad mez! 'H an da zerri an nor; suroh eo!

(O tigas ar ribod.)

Skoom hoaz 'barz hemañ! (Skei a ra eun tôl bennag.
O tizoloi ar ribod.) Ar banne lêz benniget-mañ ne deu
ket a amann warnañ. Me ya da stlapa hemañ en baraz
ar moh!

(Kas a ra e ribod er-mêz.)

Red-mad eo din ampledi 'n eur stumm bennag, ke-
ment a labour 'vel am-eus d'ober!...

Dibuni ar gloan a rankan ober bremañ. Ze deuo ganin
êzetoh 'vid ar ribotadeg.

(Mond a ra da gerhad diou bolotenn hloan
ha diou gudenn. Ar bugel a harm. En eur
vond ha dont, Yann a gomz:)

Mab braz e dad eo, ya! ya!... Hennez zo pôtr mad, ya!
ya!

(Ar bugel a ouel bepred. Mond a ra Yann
er-mêz.)

Grêt vo dañs a-bik dezañ?

*Dañs a-bik, dañs a-bik,
Hennez eo mab e dadig;
Hag en deiz hag en noz,
Hennez eo mab e dad-koz!*

Alo! Kouskom bremañ!

(Dond a ra Yann war e giz. Ar bugel a ouel
adarre.)

Out o serri da houg, lampon 'fall! Prest awalh 'm-ije
ken d'ober 'med bezañ war da dro! — Arsa, penôz e

rin-me da zibuni ar gloan-mañ? Daoust pere eo ar re dibunet, pe ar hudennou, pe ar polotennou?... Me gredfe din awalh penôz am-eus kudennou d'ober gand ar polotennou-mañ.

(Difreuzañ ra ar polotennou war eur gador.)

Arsa, bremañ, rankan kaoud eur banne, n'eus ket da lared!

(Diskargañ ra eur werennad, pa glev unneg eur o soni.)

Deg, unneg!... Unneg eur o soni, ha ma fato da beilhad, ma flouz da dennañ, ma hôl da zerri, ma moh da verennañ, ma dour da virvi, ma lêz da zigoavenni, ma zi da skubad, ha... hag a-benn eun hanter-eur amañ 'mañ Janed war ma choug!

Petra rin-me 'vid mond ar primañ? Lakaad boued d'ar yer...

(Mond a ra er-mêz o hervel.)

Bouti! bouti! bouti!...

Bremañ 'h an da beilhad pato! Ze ne harzo ket ouzin. Gwechall, er zervij, 'm-oa ket ma far da beilhad pato.

(Tapoud a ra pato 'n eur baner.)

Gwell eo din hoaz lakaad dour war an tan!

(Digas a ra eur gôter da greiz an ti.)

Ba, ba, ba! peleh emañ ma spered? Digoavenni lêz eo tremen poent din ober!

(Tapoud a ra eur bodez hag eur gloge hag eh a 'n e gluch da c'houezañ war ar hoavenn. Souden, o sevel 'vel eun tenn.)

Boñ! Ankouët am-eus selled hag-eñ e oa an u gand ar yar velen, ha klask neiz ar yar vriz!... Ha ma fresou n'int ket frotet!...

(Beb komz, eh a 'vid mond war eun tu ben-nag. O chom a-zav.)

Sell! ha ma flouz n'eo ket tennet! Med ma hôl zo ive da gerhad! Deom da gerhad kôl! Deom da gerhad kôl!

(Ar bugel a harm.)

Tu, tu, tu, tu, tu! 'm-eus ket amzer! 'M-eus ket amzer da luskellad!...

Sell! ma zi 'm-eus lezet da skubad!

(Unneg eur hanter a zon.)

Unneg eur hanter! 'Benn... 'benn... 'benn deg munud amañ 'mañ Janed war... war... war... ma choug!... Ma pozfen an orolaj da vihanañ?

(Tapoud a ra neuze an torchouer da frotañ 'r presou! KerKent e krog er skubelenn da skuba; med an traou oll zo lakêt gantañ a-dreuz e-kreiz an ti. Tôl a ra e skubelenn hag e tastum a-vriad an traou 'n eun tu; an dour a skuilh; ar hôl a gouez a-stlabez gantañ. Skubad a ra.)

Biken ne vin pare en koulz!

(Ar bugel a harm.)

Digor da houg 'ta!...

(Kleved a ra trouz treid.)

Arru eo! Fe d'am zoupen, me ya ahann!

(Pa 'mañ o vond er-mêz, e sko e benn en Janed o tond en ti gand he 'faner.)

JANED o tond en ti

Ola! ola! Peleh 'h ez da vond?... Petra eo al lêz a welan amañ 'barz ar varaz?... O den 'fall, ma ribotennad!... Hag an traou toud a-dreuz e-kreiz an ti, ha mann hrêt ebed! Hag an evaj war an dôl! A! lonker milliget!

(Stlapa ra an evaj gand penn-adreñv Yann.)

'Pad ar beure e oas o kargañ da gorf!... 'Balamour da ze, e felle dit chom er gêr!... Gortoz eun tamm!

(Yann a 'fell dezañ komz, med Janed a red war e lersh gand ar skubelenn, 'n eur youhal. Yann a deh kuit.)

Ar ridoch a gouez

GERIOU HA TROIOU-LAVAR BRO-DREGER

- pa n'oulez ket = pa ne fell ket dit (ar wrizienn-verb: « oul » ne vez implijet nemed er stumm-naha).
- chom war ar menaj = chom da ober war-dro an ti.
- entent = kompren.
- c'houezañ = c'houeza (añ e Treger e dibenn ar verbou, — hag evid an derez-uhella; ar bihannañ = ar bihanna). Skoueriou all: prenañ, gwerzañ, skotañ, hag all...
- an uou, an uiou = ar viou (T.: an u = ar vi).
- 'mon-me = emon-me, emezon-me, a lavaran-me.
- imobu = diod, genaoueg-braz.
- chakad = chaokad.
- pato = patatez.
- Töl pled = töl evez, diwall.
- kas da vêz = kas war ar mêz, kas d'ar park.
- ober an tian ganin = ober goap ouzin (?).
- eur houad, a dalv moarvad evid: eur gaouad, eur hrogad, eur barrad.
- Out o serri da houg, lakêt emichañs evid: « Emaout o vond da zerri da houzoug. »
- Ze (an dra-ze) = se.
- eur gloge = eul loa-bod.
- mann hrêt ebed = tra ebed grêt.

EVEZIADENNOU DIWAR-BENN DISPLEGADUR AR VERBOU

- abaoe on o skei = abaoe emaoñ o skei.
- ma 'h ên (ma eh ên) = ma 'z ên, ma yên.
- Diwall ervad ne ve ket... = ne vefe ket...
- laret, soñjet, gwelet, tavet, h.a... = larit, soñjit, gwelit, tavit.
- Kemmet on-eus eun nebeud verbou, ma vez grêt eun treuz-implij anezo e bro-Dreger: ma ne ve ket (ne vez ket); e vije (e veze), h.a...

Pipi Gonto

Marteze peus anavezet Pipi Gonto: eur pôtr koz treut, gand eun torkad bleo loued a goueze war e zaoulagad, eun tok ledan, eur penn-baz dero, hag eur pennad korn-butun ken berr, ken berr, m'an-nevoa mogedet e 'fri dezañ a oa ken du hag eur jiminal.

Pipi Gonto n'an-nevoa na tad na mamm, na breur na kar; n'an-nevoa micher ebed kennebeud, ha, koulskoude, Pipi ne vanke ket a vara dezañ, me laro deoh penôz: Pipi a oa eur marvailher kaer. Eur zah an-nevoa war e skoaz da lakaad e vara, hag eun all an-nevoa hoaz hag a oa leun a varvailhou. Evid eun tamm bara lakêt dezañ en e valv, Pipi a zache deuz ar zah all eur marvailh, hag, eur wech deut er-mêz, ne veze ket adlakêt e-barz: Pipi ne gave ket dezañ e veze mad boued adtommet.

Red e vije deoh bezañ klevet pe welet anezañ. Er goañv, war-dro serr-noz, Pipi a arru en eun ti mad bennag, rag Pipi eo tano e 'fri.

— Arru eo Pipi!...

Hag ar chas da harzal hag ar vugale da youhal:

— Mamm, fenoz nan in ket da gousked!

— Tostaet war-greh, Pipi!

Ha lakêt Pipi war ar chipod, er horn uhellañ euz an oaled, roet dezañ eur skudellad soubenn domm, eur skudellad jistr.

— Tonton Pipi, eme ar pôtr bihannañ, laret eur gontadenn din.

— Gortoz eun tamm, ma fôtr, eme e vamm, m'an-nevo debret Pipi e goan... Pet soñj, Pipi, amañ e chomfet fenoz.

— Mad! mad!... eme Bipi.

Arru eo an ozah hag e dud d'o hoan:

— Arru oas, Pipi? Mad sur, mad sur!...

Debret koan, gwalhet ar skudellou, grêt eur hlaouia-senn vad a dan, lakêt an tan war ar herniou-butun, ar merhed tapet gante peb a gegel, ar vugale bodet en-dro da Bipi ha dislontret o daoulagad warnañ:

— Doue hag ar Werhez da vo meulet! eme Bipi.

Mad eo an taol, ha setu Pipi da stagañ ganti.

— Fenoz, mar bez bolante Doue, me zisplego deoh...

Raktal ar merhed da zevel o 'fenn, en eur hlebiañ o biz, ar vugale da zigeri o genoù, ar bôtred da dostaad.

Erwan AR MOAL.

(Kentskrid « *Pipi Gonto* »),

adembannet e Kemper, e ti Ar Goaziou, 1925.)

GERIOU HA TROIOU-LAVAR BRO-DREGER

- **an-nevoa** = en-devoa, en-doa, e-noa; - **an nevo** = en devo, en-do, e-no.
- **nan in ket** = n'ez in ket, n'in ket.
- **Tostaet** (tosteet) = tostait; **laret din** = lavarit din.
- **Pet soñj** = Ho pezit soñj; - **e chomfet** = e chomoh.
- **bezañ, stagañ, glebiañ** = beza, staga, glebia.
- **uhellañ, bihannañ** = uhella, bihanna.
- **gante** = ganto.
- **da vo meulet** = ra vo meulet.

Tôliou-spont

**Diwar pennadou kaset da
Bevare Kenstrivadeg Brezoneg
ar Skoliou**

Aon rag an naer:

... Futella rê an naer 'n eur denna he zeod e-méz.

— Gortozit! 'Malk-tuchant vo gwelet piou ar mestr amañ!

Krenâ rên gand aon koulskoude. Ha me mond da zastum eur vaz da zistruja al loen fall... Pa oan deut endro, an naer a bare he daoulagad dir warnon. Me lammas dezi. An tôliou baz evel grizilh a goueze war al loen vil. Yudal a rên ive da sponta anezi ha 'vid digas kouraj din.

Deut oan 'benn deuz-outi. Sklapet 'm-oe nezi du-mañ du-hont ken ne fîve mul anezi.

— Me zesko deoh, loen an diaoul, dond da sponta an dud...

A. JEGOU, Skol Sant-Yann-Trolimon.

Aon rag eur had...

... En eur baseal eun toull-karr da vond en eur park, e klevan eun trouz, ha kercent ez eas daou aneval e-biou va zreid: ne oa nemed eul lapin hag eur hi war e lerb... Spontet oan bet beteg ma ne rên nemed krenâ!... Va halonig baour a lamme, — ha va izili a oa skornet gand ar spont.

Drouklivet evel eur horv maro, e tigouezan en ti.

— Petra 'ta zo en em gavet ganez? a houlennas diganen va mamm.

Kontet 'm-oa dezi va zro.

— Te zo sod awalh: aon deuz eul lapin hag eur hi!

M.-M. COMBOT, Skol ar merhed, GARLAN.

Aon rag eun den-plouz...

... Erruet e oan en hanter penn eun dachenn, ha me ha sevel ma 'fenn: petra a welan? eun den divalo ha ne vouje ket, e-kreiz eur parkad peb bihan. Ken spontet e oan, ma ne oan ket gouest da vale; ma halon a lamme krefiv. Paseet e oa eun nebeut muniziu abarz 'm-oa gallet mond kuit. Komañsed e oan da redeg ha da redeg, beteg ar gêr, en eur grial.

Spontet ivez ma mamm ganin.

— Petra a zo c'hoarvezet, ma merh, petra: lavarit din buan!

— Me am-eus bet aon a-rôg eun den divalo e-kreiz park Izidor an Trest.

— O! n'eo ket posubl e pefe bet aon a-rôg an den-plouz-se, emezl. Hemañ a zo bet lakêt da sponta al laboused, eur bra-gou truilh peñseliet gantañ, e zivreh digor-braz, eur jupenn rouz war e gein hag eun tok rond giz ar vourhizien war e benn...

Kement a aon am-oa bet m'am-oa kollet ma fez hanterkant lur!...

Y. LE LANN, Skol ar merhed, *Ar Faou*.

Spontet gand ar haz du...

Eur wech, giz on boazet, voen ét da ober tan dindan ar poalad avalou-douar evid ar moh. Ar poal oa plaset en eun toull teñval ha ne welen ket kalz a dra nemed an tan. Me a oa o soñjal e-barz an neizou 'm-oa kavet an devez-se: eun neiz pig, eun neiz moualh... N'am-oe ket amzer da zoñjal muioh: eun dra bennag a baseas dirag ma daoulagad giz eur barrad avel. An tamm tra-ze a bignas war ar poal ha goude-ze e-barz ar fimal en eur ober eun trouz spontuz. Ne vije ket bet netra, ma ne vije ket bet kouezet n'ouzon ket petra war ar jidouarn ha goude war ma 'jenn.

— O, va Doue! Kenavo ma neizou! Me zoñje ma eur diweza a oa digouezet, hag an diaoul o tond da gemer ahanon.

Me a deuas buan 'mêz o klask kompren petra a oa an tamm trouz-se. Spontet fin e oan. Abarz ar fin me welas o tond 'mêz ar fimal ar haz du o sklejad eun anduilhen war e lerb!...

— A! a! a! Bremañ e komprenan! Ar haz du a oa o redeg warlerh eul logodenn. Houmañ a oa pignet 'barz ar fimal... Ar haz du n'oa ket kavet netra, hag a lammas d'an traoñ o tigas gantañ eun anduilhenn. A! a! a! talvoud a ra ar boan gweled ar haz du gand e anduilhenn bremañ!...

J.-Cl. GADONNA, Skol ar bôtred, PLOVAN.

Eun huñvre spontuz...

An nozvez-se, e-kreiz va housk, e oan strafuilhet-net; ne welen nemed naered endro din, em gwele ha war ar zolier, naered rouz hag hir, sounn o 'fenn ganto, o tond din. Me en em lakeas da grial a-bouez va 'fenn: « Mamm! n'eus nemed naered rouz hag hir, flemmet on ganto. Mamm! deus buan da gas anezo kuit! » Lefiva a rên doureg. Ranket he doa va mamm kas ahanon ganti en he gwele.

Y. QUEMENER (An Trehou), Lise LANDERNE.

Tost da beñsea:

Eun dervez, da houde lein, me ha va zad a oa 'vid mond da besketa kichen ar Vein Velen. En dervez-se e oa bet eun tammig brumachenn. Pa edom emgavet hanter hent diouz

ar Vein Velen e santom ar hanod o dounaad 'barz ar mor. Va zad a lavare:

— Petra zo emgavet?...

Pa oe sellet ouz kostez ar hanod, va zad a bakas eur plankenn diouz an araog. Med pa edo ét da glask poeñchennou, ne oa hini 'bed 'n oll. Ar hanod a yê dounnoh atao 'barz ar mor. Ni a oa emgavet 'tal an aot. Setu e plantom 'benn d'an douar. Neuze edo beuzet ar moter... Me ha va zad on-oa bet aon en dervez-se!

J.-Y. JEZEQUEL, Skol TREZIEN.

Harzet gand lakepoted, en noz...

Sebezet on chomet o weled daou zen o tond a-benn din. Spontet on bet war an tól. Deut on daou pe dri faz war va hiz, lakêt va dorn war va stomok. Chomet on bet aze heb galloud kôzeal...

Lavaret zo bet din sevel va daouarn en neh, ha goulennet diganin:

— Piou out ha peseurt emaut o vond d'ober dre amañ?

Me, atao spontet, n'edon ket gouest da respont dezañ. Goulennet e-neus eur wech all diganin. Kroget e-neus ennon; prest e oa an den da lamma warnon, p'am-eus gwelet va hi Diñ en va hichen. Diouz peleh e oa deut? Biken araog ne zeue war va lerb. Iset am-eus anezañ warno. Dioustu e-neus lammet outo, hag ar re-mañ a haloupe en e ziarag. N'on ket chomet da weled peleh ez ént...

F. COLIN, Skol ar bôtred, PORSPODER.

An taro kounnaret...

... En eun taol oam bet spontet: eur vlejadenn spontuz a oa deut euz ar penn all d'ar foenneg hag eun aneval a oa troet etrezeg ennon, en eur heja e benn kerniel hir. Ni a anavez re ar zaout evid kemer aon rag eur vlejadenn, hag e oam en em lakêt da zastum mouar du... Mez a-greiz-toud, evid an eil gwech, e klevom adarre ar vlejadenn spontuz, ha trouz treid pounner o toumpal: e oa an aneval hor boa gwelet d'ober o redeg etrezeg ennon.

...Neuze on-oa kemprenet:

— Eun taro pennfollet! a oam komañset da grial oll asamblez.

— Buan, buan! a lavaren, beh warnon.

Sacha a rên war va genitervezed da zond da va heul. Setu ni en eul lamm er-mêz euz ar foenneg.

Poent e oa sach a on treid gameom: an taro a oa kazimant war on seuliou, hag an aneval, mantret o weled an toull re enk dezañ, a oa chomet a-zav...

Ken spontet e oam bet, ma oam gwenn evel eun tamm paper-lizer; or halon a skoe buan en or hreiz. Krena a rên, hag a-veh ma helle on divesker delher en o zav. Tamm oa bet deom!...

Anna BARS, Skol ar merhed, KASTELL-PAOL.

O tehoud dirag al lutuned...

... Dre forz redeg, e teu ma halon da vankoud din; red mad eo din chom a-zav. An trouz a heuilh ahanon bepred hag o dosta buan. Ha me o vond da lañsa adarre, med si-waz ma botez a stok deuz eur mên hag e kouezan a-led ma horv mesk an deliou seh. Heb fifival ha sioul evel eun den maro, e laren ouzin ma-unan:

— Marteze ne welo ket ahanon!

Med al « lutun » a zo aze: eur hlizenn domm a ruih war ma zal. Ne gredan ket sevel, na dizalani.

Eun dra bennag a gomañs lipad ma bizaj. Skei a ran eun töl evid kas kuit al lutun. Evid gwir, tehoud a ra, - med en eur harzal!

— Sell 'ta, emon-me, eur hi!

Neuze eh anavezan ma hi, Diane. Gervel a ran anezañ hag e teu em hichen.

— Te zo aze, Diane? Deus amañ. Eom d'ar gêr, heb ket a aon dirag al lutuned!

R. CUDENNEC,

Skol Micheriu Ar Bougen (C.A.B.), BREST.

Va-unan en ti...

... A-greiz-oll e klevis an nor o vistoullad hag e houlen-nis piou a oa aze. Respont ebed! Ha me da lared d'an den n'am mije ket digoret an nor ma n'en nije ket laret din e ano. Hag an den da lared din:

— Digorit an nor bepred, hag e lirin ma ano deoh. Me a zo deut da weled ho tad hag ho mamm.

N'am-oa ket kredet an den-ze, ha ne zigoris ket an nor. Hag an den dond d'ar prenestr ha bountañ warni.

— Pa n'hellan ket digeri nag an nor nag ar prenestr, me a zo o vond da gousked 'er hraou!...

Pa zeuas ma zad ha ma mamm d'ar gêr, e lavaris dese ar pez am-oa klevet hag e soñje din e oa ét an den d'ar hraou. Aze e weljont an den kousket e-touez ar givri. Mezo e oa an den-ze, hag e oa ét da ziskuz e-barz ar hraou.

J. KONAN, Skol ar bôtred, GRONVEL.

Eur bern pennadou all, savet gand bugale pe tudou yaouank or skolioù o kemer pezh e kenstrivadeg « Ar Falz », or-bije karet rei amañ, m'or-bije bet pajennoù awalh... Pennadou o tondeuz Sant-Kleve, pe Lennon, Penn-ar-Hran, Plouder, Hañveg, Sizun, hag all... (ouspenn ar parrezioù meneged amañ uheloh), hag euz Liseou Kemper, an Oriant, Montroulez, Landerne, Brest, Pont-n-abad, Skolajou an Oriant, Kemperle, Skolioù-Mistri, hag all.

Ouspenn-ze, digouezet eo ganeom eun toullad kaer a dennadouskriz euz ar henta kaset deom gand micherourien, labourerien-douar, hereourien, pôtre-al-Hisri, hag all, anezo brezonegerien o kemer pezh e Kenstrivadeg-Pobl « Ar Falz ».

Diwar-benn Meurlarjez**Gwechall e bro Ploneve-ar-Faou:**

D'ar mare-ze e oa kalz tud paour er vro o klask o bara. Da zevez Meurlarjez en em vode eur rummad anezo evid ober tro ar barrez, ganto peb a benn-baz, hag a yent euz an eil ti d'egile o kestal kig sall pe kig moh. Pa zigouezet dirag eun ti e lavarent:

*Fañch ar Hamm a zo er penn
Yann an Treut ar Habiten,
Loeiz ar Born ar mevel braz,
Ha kalz reou all emaint hoaz.*

Neuze e teue mestrez an ti da lavaroud dezo dond e-barz, hag e roe-hi dezo beb a vanne sistr. Hag ez é d'ar ballh da gerhad eun tamm kig moh sall a veze roet dezo ha lakét en eur zah e veze ganto war o hein. Unan anezo a stage eun tamm kig sall ouz penn eur vaz hag e veze gantañ war e skoaz.

Pa ne veze ket roet netra dezo, pe pa ne veze den er gêr, e lavarent a-bouez-penn:

*Dalhit ganeoh ho kig-sall,
Rag ni on-o gand ar re-all.*

Pa veze echu an dro, e veze rannet ar hig sall etrezo, ha ne veze ket dao dezo debri bara seh e-pad pell, rag kalz a gig o devoa dastumet. M. LE JEUNE, Lise KEMPER.

E bro Lanhouarne:

Diouz ar mintin, da veurz al lard ez é paotred an tiegeziou da balad eun tammig douar patatez e ti ar vicherourien; ar hloher, ar halvez, ar marichal, ar hemener hag all; peb hini avad a deue d'ar gêr da zebri ar pred braz. Da houde e veze aradeg, ar pez a auver bremañ « concours ». Ar baotred vad a yé en eur park leton da arad, hag e veze gwelet piou a rê ar gwella labour.

Da houde e veze hoaz toret podou koz a veze staget etre daou di er bourk. Ar podou-ze e veze lakét, en unan dour, en unan all dutun, en eun all lèz, en eun all mounetiz pe traou all. An den a veze mouchet ha pa en em gave da derri pod an dour pe al lèz, ne veze ket drao da weled.

Ar « cheuiou » a bade betek an noz: redeg ar gwalenn ha sacha war al liamm. L. OLLIVER, Skol LANHOUARNE.

E bro Ploueskad:

Da veurz al lard, ar plah pe ar mevel, e veze roet dezo eur patestez pe eun tamm freskad da gas d'o zud...

Da houde lein, ar bôtred yaouank a en em vode evid mond da redeg ar gwalenn, bragezeier gwenn ganto. Eur c'hoari brao e oa an tennadeg d'ar gwalenn. Eur walenn a veze lakét en istribilh. Ar « gavalierien » a en em vode daou pe dri hant metr pelloh, eur wialenn ganto en o dorn hag ez ént neuze an eil goude egile d'an daou lamm ruz en eur biza d'ar gwalenn. An hini a laké e wialenn e-barz ar waleun da

genta, hennez a veze ar maout. Mez n'oa ket gwall êz da ober, rag an dud a oa o selled a rê aon d'ar hezeg hag ar paour kêz « kavalier » a yê aliez a-gostez. Neuze e veze eur pezh c'hoarz. A-barz ar fin evelato, unan bennag en deveze chañs da lakaad er walenn, hag hennez en deveze ar priz.

Bez e veze ivez *redadeg ar hilhog*, hemañ o veza lezet da redeg en eur park leton. An dud a rede war e lerh. Pa gave d'ar hilhog e veze beh warnañ, e nije a-zioh o 'fenn, setu ma o deveze poan o paka anezañ. A-barz ar fin evelato, e teue da skuiza hag e ranke en em rei da unan pe unan ar paour kêz kilhog.

Deut ar pardaez, an dud oll, merhed ha pôted kêr a bourmene eur bolom kolo ganto dre ar ruiou, ha goude-ze ez ênt war bord eur rivier da gana al libera hag o lavared kenavo ar bloaz a zeu.

Dastumet gand P. ROUE, Skol PLOUESKAD.

E bro Louargad:

Ar meurz da noz, Sant Meurlarjez a veze devet war blasenn ar bourk. Oll an dud yaouank a gane hag a dañse endro dezañ. Kaset e veze Meurlarjez d'ar stank evid beza beuzet.

E-pad deveziou Meurlarjez e veze kalz c'hoariadennou. Dihougañ ar waz: ar c'hoarierien a dremene 'barz eur harr, dindan ar waz staget ouz eur gordenn, eur vaz en o daouarn, hag e roent eur flipad dezi war he houzoug. An hini a dihouge anezi da genta a oa gounez.

Ar bôtred kreñv a yê da zach war ar vaz pe war an tortis. Kalz a c'hoariadennou all evel « charren an touseg » pe « difrapadeg al lez » a lakê an dud da hoarzin.

'Benn an noz, aliez e save kann. Neuze e echue ar gouel gand eun tammig gouren, hag unan bennag a yê en eur jilgamma d'ar gêr.

Ankounac'hêt am-oa lavared deoh penaoz ar plah yaouank a zimeze e-kerz Meurlarjez a veze grêt « Gwrah al Lard » diouti.

E. RAOULT, Lise GWENGAMP.

E bro Purid:

Da lun ha da veurz-al-lard e veze redadeg kezeg ha redadeg tud, sachadeg baz-yod, dañs-ar-butun, dañs-an-dro, dañs-Fanch, dañs-Fisel, hag all.

Evid echui, da verher, e veze interet Sant-al-Lard. Lakêt e veze 'barz eur harr. Er brehiou e veze daou bôttr goloet evid drevezañ eur marh. A-dreñv e veze tud gwisket e du, oh ober van da ouelañ. Oll e rênt ardou. Grêt e veze tro kêr, hag evid echui, e veze interet Sant-al-Lard 'barz eur stank.

A. AR BOUEDEG (euz Purid-Kintin), Lise GWENGAMP.

Ma plij da lennerien « SKOL AR BREZONEG », roet e vo eun dibab euz an oll bennadou digouezet ganeom en eun niverenn all da zond.

Bez a hellfe eun niverenn bennag du-mañ du-hont beza implijet penn-da-benn evel-se da embann danevellou ha pennadougou a beb seurt, skeudennou d'o heul, kaset deom euz ar skoltou ma kelenner enno ar brezoneg, pe o tond diouz ar bobl.